

# Gwerz war dismantr spontuz Toulon en 1911

## war Listri ar “Gloar” ag al “Liberté”

(Ton Paotret Plouillo)

1

O traou-Doue ! kenvroiz ker, penaoz hellout disklæria  
Ar gwalheuriou spont êrûet em porz Toulon vit ar bla ?  
Lec'h ma sko taoliou ken pouner war-n-homp ar walen digar !  
Ma m'an Breiz-Izel ag ar Franz en kanvou ag en glac'har !...

2

Da genta war bont lestr ar “Gloar”, martolodet o tenna,  
Eun obuz 'raok mont er c'hanon 'gemer tan a greiz-holla.  
Ag a strink en tre ho daouarn ker prim ag eul luc'heden :  
C'hoec'h a zo skôet d'ar maro ! darn all blonset n'ho c'hichen.

3

War ar c'hoec'h a goll ho bûe, pemp anê 'zo Brêtoned :  
Demp-ni aman, dreist-holl d'ho zud, pebeûz kêlou da glêvet !  
An *Ausetgn* a oa deuz o ren n'eo met tri bloa war-n-ugent,  
Mab da Vaestr-skôlaer Gwerliskin, pegen poaniuz d'he gerent !

4

Met kement-man, mignonet kaez, zo dister c'hoaz koulskoude  
En kichen an dismantr spontuz ! c'hoarvezet prestik goude,  
Gant lestr ouarn al “Liberté”, batimant braz a vrezel,  
Saillet prim tud ag all en aer ! hep hellaez nikun tec'hel.

5

Na ziroll ked eur pil arne ken a weler koumoul dû,  
Na ken a goez eur berad glao da laret demp 'eo êru :  
Daoust ag hen c'hoarvez kement-man ? eun tenn araok ar strak braz !  
Strop ar “Gloar” 'raok al “Liberte” ! Brezel martreze warc'hoaz !?...

6

D'ar bemp war-n-ugent Gwengolo, kent c'hoec'h-heur deuz ar beure,  
Kroget an tan er poultr enn-hi, 'eo e fraill al “Liberté” !  
Straket evel eur pez boutez ! gant eun drouz yud a garo !  
Tri c'hant trêgont a dud 'n'eun taol zo falc'het gant ar maro !!

7

Sonjit pebeuz taol-spont euzuz ! gwelet en eur flamijen  
Eur vatimanchet tud a bez strinket trezek ar wabren !  
Korfou rannet ! ezel distag ! en kreiz berniou traou draillet !?  
Katz deuz ar re 'goe beo er môr zo kerkent beuzet, lonket !

8

Gant ar stronz ag an nerz diroll ! deuz eun *tenn-min* ken dispar !  
Klêvet bepred seiz lêo tro-rond, ma kreen ar mor, an douar !  
Zo drastet listri-all tro-zro. grellet tier en Toulon !  
Lêc'h ma tifün an holl kerkent, gant an nec'h ag ar spouron !

17

Digor 'eo ar sklaourtour deuz *kroec'h* ! e m'an ar stêr war he roll,  
A ma zo krôz a bec'h dindan ; m'ar m'an ar stâl en argol,  
'Zo tud diskurpul em pep tû, disléal a divalo ;  
Tud a na reont ken foeltr-forz, barrek d'ober kement-so !?

18

Glêver ken komz met euz ar Grêvr, müntradedk a gwalheuriou,  
Trainyou tud drasket a brêvet, kollou direiz a verniou :  
Daoust piou a baëo *tout*, ma n'eo ar poanier gant he c'hoerien ;  
Brao ma na laez c'hoaz gant he yalc'h, he skiant ag he grôc'hen !

19

War an tom memeuz e klêvan ar brud deuz eur gwall gêlo :  
Eun taol sâbotach-all are war lestr braz ar “Mirabo” ;  
Vit ma kendalc'h eur seurt c'hoari, ganemp dreist-holl war ar mor,  
E c'heller laret 'eo êchu deuz hom nerz ag hom enor.

20

Vit ma na glesker prim-a-prim laket eun harz krenn d'an drouk,  
Ne oar den pe sort bec'h, breudeur, a chach ar Franz war he chouk :  
Dirak eur stad ken dismantruz hom dever 'eo testeni  
Ma vo boutet an ouarn-ru tre beteg fonz ar gouli.

21

Rag ar pep goasa 'vidomp-ni, siwaz ! tud a Vreiz-Izel,  
Ed kement darvoud a zigoez war vôr, a dost ag a bell,  
Eo gwelet hom c'henvroiz ker tiset dalc'hmad da genta,  
Vel en Toulon, lêc'h maint are an *tri-c'hart* d'an neubeuta :

22

Gwelit em pëvar c'horn hom bro n'ag a bed mam en glac'har !  
N'ag a bed pried en anken ! eun tad, eur breur pe eur c'hoar,  
Kollet unan demeuz o re : klem ag hirvoud em pep kear !  
Hep komz deuz ar bern ankeniet gant ar re 'chom en danjer.

23

Neuz ket ar sort d hom bro vihan da sonet da bourvei  
Martoloded gvestl d'hör Bro Franz evit derc'hel he listri ;  
Ma na weler en pep gwalen met paotret stard an Arvor,  
Koeët oc'h ober ho dever, skôet er penn a enor !

24

War zouar kerkoulz a war vor, maint eun penn an armeo,  
Prest dont d'an tan evit ar Franz, da ziwall d'eï he drapo ;  
Ag er peoc'h koulz ag er brezel, em pep lêc'h ni vo dalc'hmad,  
O tougen ar bec'h pounerra, o rei hom nerz ag hom goad !

Sonjit pebeuz taol-spont euzuz ! gwelet en eur flamiñ  
Eur vatimanchet tud a bez strinket trezek ar wabren !  
Korfou rannet ! ezel distag ! en kreiz berniou traou draillet ! ?  
Kalz dez ar re 'goe beo er môr zo kerkent beuzet, lonket !

8

Gant ar stronz ag an nerz diroll ! dez eun *tenn-min* ken dispar !  
Klêvet bepred seiz lëo tro-rond, ma kreen ar mor, an douar !  
Zo drastet listri-all tro-zro, grelllet tier en Toulon !  
Lêc'h ma tifiñ an holl kerkent, gant an nec'h ag ar spouron !

9

Pejou dir ag ouarn pouner 'oe sklapet duma-duhont,  
Ag a lac'h tud pell ac'haz : an holl a green gant ar spont !  
War eul lestr all 'oa destumet dornik ar c'hleroner kaez,  
Krog bepred en eun tam klêron ! dre-holl, garm, poan ag enkre !

10

Plusken al Liberte faoutet ! 'zo trêezuz da welet :  
War-n-hi, n'he c'hreiz, vel en dro d'ei, tud friket pe gwall c'hlazet !  
A geser d'an hospitaillou, lëc'h 'varw c'hoaz meur a hini,  
Goad an holl a deu da yena dirak eun doare ken kri ! !...

11

Nann ! biskoaz 'oe klevet er Bed, tenn ken s'krijuz o strakal !  
Oc'h ober ken kraz reuveulzi, na gant "Iéna" na lestr all ?  
Eur c'hreen-douar hepken helfe rei d'an den ken goas spouron !  
A skuill en dro dezan kement a gaon ag a rann-galon ! !...

12

Sonjit er c'hollou diniver gret en eun instant d'ar Franz ?  
En toul a renk beza stouvet a benn ma tapo he lanz :  
Renkout koll gant kement a dud unan he listri kaera !  
Koustet daou-ugent milion, a ne dal ken eun netra !

13

Sonjit c'hoaz e n'eur gav an taol pa zo trouz brezel en aer,  
Pa na oa mestr ebed war dro (!) da rei urzou prim a sklaer.  
Ar benvek nerzuz dianket, ag hen gret vit om difen,  
Ra demp er c'hontrol kalz gwasoc'h vit hom holl enebourien.

14

Penaoz eo bed kroget an tan el lestr ouarn war an dour ?  
Eun darn a damall d'ar poultr B, kalz da zorn eun torfedour :  
Mes neuz forz penaoz, kement-man zo eur gwall gentel d'an holl  
Da ziwall dez ar poultr noazuz, koulz a dez an dud diroll.

15

Kredabl deoc'h o welet penaoz e tremen an traou en Franz  
Vaer techet da gredi dustu eo gret an taol dre venjanz ?  
Eur *Sabotach* lrsk ag udur, eun taol yudaz dishano,  
Er stum d'ar re 'dremen ken stang war hentchou-ouarn hom Bro.

16

Daoust trezec'h pelëc'h e kerzomp ? poent eo demp teuler evez !  
Ar c'hâr a zac'h em pep-skoasel ; an hent zo gwell digompez,  
Aboe m'o dez kresket ho fae hor c'hannadet hep goulén,  
Eo e talc'h an traou dont en gin ; 'ra pep-hini he lezen :

Tous droits réservés.

Neuz ket ar sort a hom Bro Vihan da sonet da bouar  
Martolodet gwesti d'hor Bro Franz evit dere'hel he listri ;  
Ma na weler en pep gwalen met paotret stard an Arvor,  
Koeët oc'h ober ho dever, skôet er penn a enor !

24

War zouar kerkoulz a war vor, maint em penn an armeo,  
Prest dont d'an tan evit ar Franz, da ziwall d'ei he drapo ;  
Ag er peoc'h koulz ag er brezel, em pep lëc'h ni vo dalc'hmad,  
O tougen ar bec'h pounerra, o rei hom nerz ag hom goad !

25

Ogen, ma tarz ar brezel rû, gant an armou 'zo breman.  
Na goassa distruj na dismantr, en kenver an daou strak-man !  
Neuze nê ket a gantvejo, vo grillet bugale Breiz,  
Met millero war villero ! ma kreen ar galon er c'hreiz !

26

Kement-man ziskwel sklaer d'an holl follentez ar brezellou,  
Ag ar berniou koll na ve ken o veska poultr ag armou ;  
Rag dre forz c'hoari gant an tan 'vaer skotet zur tro pe dro :  
Digoulzet eo laketa eun harz ma vo Peoc'h entre peb Bro.

27

Ogen, pa garo ar re *Vraz* ober ar peoc'h entrese,  
Ar re *Vihan* 'zo prest raktal dre-holl da c'heuil aneze :  
Da chom er gear da labourat war draou muio'h talvouduz,  
Gant benwyou kalz disterroc'h, met neubeutoc'h danjeruz.

28

Benn harz an armou da noazout barz em pep lec'h war ar bed,  
Laket ar peoc'h entre pep rûm, eun emgleo sklaer a zo red ;  
Ag ar re 'zo dez om gouarn em penn peb bro zo barek  
D'en ober, 'vel 'ra brao aman eur maer 'tre daou amezek.

29

Dirak kement all a skiant a ren dre-holl asamblez  
Eo mezuz diski 'n'em lac'ha ! stankomp goad ar boblou kaez ;  
An Amerik, Bro-Zaoz a Franz, ar Pruss ag an Itali,  
Harzo, pa refont ho dever, ouzimp eur seurt reverzi !

30

« Nem geromp an eil egile ! » lar demp ar Skritur zantel ;  
« An holl 'zo breudeur war ar ar bed ! » tôromp he nerz d'ar brezel !  
En deiz 'vo ken a voutiji da garga pejou kanon,  
Vo mui na draill, na ker goas spont ! met karante leiz kalon !

31

Eur wech vo trôet ar boblou, lec'h koll amzer en arme,  
War al labouriou mad a kaer, ar peoc'h paduz entrese,  
Ar furnez a reno dustu, gant eun évrustet dispar !  
Ag hep dale vo gret dre-holl eul liorz dez an Douar !

32

Met da c'hortoz, mignonet ker, greomp bepred hom dever,  
Evel e meump gret a viskoaz, em pep lec'h, em pep amzer ;  
Ag eun deiz ni vo digollet gant ar Maestr braz dez an Trôn ;  
Ar pez a reketan deoc'h holl demeuz a greiz ma c'halon.

CHARLEZ ROLLAND, *Martolod koz.*

# UNION DE LA BRETAGNE A LA FRANCE

(Stâg Breiz deuz Franz)

*Da ANNA, divëza Dukez Breiz*

## I

War gern ar bed tro-ma, em beg an douar koz,  
En eonv dirag ar mor, war zû an Anter-Noz,  
E zeuz eur vro vihan, he hano Breiz-Izel,  
So enn-hi tud a boan, a galon ag a boell ?  
Saozon na Gallaouet, keneubeut pobl Sezar.  
Biskoaz ar wenn-dud-se deuz bet hellet diskar ?  
En despet brezellou, emgannou niveruz  
A dremene dreist-hi fuloret ag euzuz !  
Ar vozadic tud-se a chome zonn n'he zâ  
He unan dismantret, da rei penn d'ar bed-ma !  
A bete war diskar ar bemzekvet kanvet  
Ar c'horgnad tud stard-se a zalc'he gweon bepred.

## II

Er penn euz ar vro-ze, ô Dukez vad Anna !  
Eo e z 'oaz bet galvet d'an oad a zaouzek vloa,  
A te emzivadez deuz tad koulz a deuz mamm,  
N'eun amzer a drubuill : Pebeuz karg ! pebeuz samm !  
Rak petra 'eur plac'hic em penn eun tammic bro  
A oa c'hoant da ziskar aboue keit all zo...  
Kuzuillet dizhengal dre ma savaez en oad,  
An holl a glask gonid deuz eun evelep stad ;  
Da galon wir a mad ne c'houlenne ked well  
Nemet laket ar peoc'h da ren em Breiz-Izel ;  
Ne gave ket dezan oa gleët d'ar Bleizy  
Taga an Erminik pa chome zioul n'he zy !

Allaz ! pennerez kaez ! se c'hoarvez koulskoude.

An istor 'zo garo, ag eun darn martreze  
'Rebecho did uun deiz beza gret kement-se,  
Met kousk em peoc'h war ze, diveza Dukez Breiz ;  
An neubeud a veffont vo barnërien direiz :  
D'an heb a gar he Vro, d'an hep a neuz kalon,  
E peuz gret er c'hontrol eur merk fur a gwirion,  
Rak da Vro gaez bep gwech ma vije taoliou chao  
En tre ar broyou braz a vije waz atao !  
Divlamm, diwar da roll houd bed e n'em rôet,  
A Breiziz ouz da c'heûl n'heint bet tamm diskaret !  
Hom bro n'eur rei he dorn d'ar Franz he c'hoar ena,  
A zao kalz hûelloc'h he fenn war ar bed-ma !

A neuze, er stag-se 'oaz n'em gemëret mad  
Vit ma talc'hche da Vro bepred er memez stâd ;  
War da gen-skrid-euret p'oa divizet daou dra :  
Ra chomche da genta lezennou Breiz n'ho zâ,  
Gant he yez em pep skrid, he stum ag he gijou,  
Hep trei he barnërez na kreskad he c'hargou ;  
A d'an eil, kenderc'hel da c'hwarn da unan-penn,  
Tre vijaez em bûe war-n-hi ag he mibien...  
Bed diou wech demezet da hir e peuz dalc'het,  
A Breiz 'oa er c'heit-se er brassa êvrustet !...

Ar sonj ouzit, Anna, zo beo bepred er vro !  
Da vadelez kanet a dreuz an amzerio !  
Breiziz yaouank hirie, vel breudeur gant re C'hall,  
N'o deuz kollet netra deuz ar galloud gwech-all :  
D'ar pez a garioz kement e telc'hont stard bepred,  
D'ar stum a d'ho gijou a d'ho iez biniget !  
A daoust ma zo aboe ouspenn pëvar c'hant vloa,  
Da Vro gen Anna Breiz, zo chomet memez tra !

Kuzuillet dizhengal dre ma savaez en oad,  
An holl a glask gonid deuz eun evelep stad ;  
Da galon wir a mad ne c'noulenne ked well  
Nemet laket ar peoc'h da ren em Breiz-Izel ;  
Ne gave ket dezan oa gleët d'ar Bleizy  
Taga an Erminik pa chome zioul n'he zy !

Allaz ! pennerez kaez ! se c'hoarvez koulskoude,  
A bep lec'h e tispak prinset a rouane :  
En ged d'az pro a d'id e tiredont gant mall,  
Deuz a Rom ag ar Spagn, deuz Bro-Saoz a Bro-C'hall :  
Pep-hini 'ra kement o c'haesa beza trec'h,  
Ken a green an Urop gant ar spont ag an nec'h !  
Dibabet p'oa da c'hoant koulskoude er vanden,  
A roet da galon d'ar prinz Maximilien ;  
Met eun dukezic koant pa yud al Leônted,  
Ve ked maest d'he c'halon, d'he dorn na d'he genet !  
War ze 'sao brasoni, kroz a bec'h a beb tû  
A gwasoc'h vit biskoaz e tarz ar brezel rü.

Charlez keiz a Vro-C'hall, ma n'hell da eureuji  
A dou distruja Breiz, Bro-Saoz, an Itali :  
Siellet houd gantan he kear-benn a Roazon,  
Dre holl e sklab ar c'harm, ar c'haon ag ar spouron,  
Pa gass da c'houll da zorn e leraez n'eur gir krenn,  
Gemerchaez biken eun den kiriek d'eur seurt anken !  
Breiziz 'oa koulskoude pell-zo dindan ar bec'h ;  
Met bosen, goad a tan na weler em pep lec'h,  
Mantret gant ar glac'har, te skwill d'elo a oad ;  
Klemmou da bobl leal a c'hlaz da galon vad !  
Neuze, trec'het er wall, kalonek te n'em ro  
Vel pried da Jarlez vit savetaad da Vro !

### III

O Dukez kaez Anna ! daoust piou 'wëo biken  
Ar sonjou 'dremenaez en deiz-se dre da benn,  
Rak goup a wiaez mad e c'haez da zizober  
Eur stâd ag a bade aboe keit-all amzer !  
**Goud a wiaez Breiziz vije kentoc'h draillet !**  
**Vit e n'em rei biken dre nerz d'ar C'hallaouet !**  
Goud a wiaez ive renkchaez rei da Jarlez  
Ar gwir a Vreiz-Izel gant da gurun Dukez ;  
Met gant furnez ive te wel dre an tû-all  
E vije harpet mad da Vro gant hini Gall ;  
A penaoz gant eur gir e rôaez c'hann da bell  
Ar peoc'h, an évrusted, da pro ger Breiz-Izel !

Ar sonj ouzit, Anna, zo beo bepred er vro !  
Da vadelez kanet a dreuz an amzerio !  
Breiziz yaouank hirie, vel breudeur gant re C'hall,  
N'o deuz kollet netra deuz ar galloud gwechail :  
D'ar pez a gariez kement e telc'hont stard bepred,  
D'ar stum a d'ho gijou a d'ho iez biniget !  
A daoust ma zo aboe ouspenn pëvar c'hant vloa,  
Da Vro ger, Anna Breiz, zo chomet memeuz tra !  
Ma zeuz n'heb neventi e m'an en kerz ar bed  
A c'heuilomp hez roujou gant Franz hor bro garet !

### IV

O Dukez vad Anna. prinsez fur a dispar !  
Ra vezi da viken meulet war an douar !  
Gant bugale vihan ar bobl p'euz ken karet,  
A vit vad pehini houd bet e n'em westlet.  
Da dremm kaer a lugern ebarz er penn kenta  
Vel hom gwir batronez en istor ar vro-ma :  
N'eun laket houd, plac'hic, en kreiz tre an diou Vro,  
Gret d'hê n'em unani dân ar memeuz drapo !  
Gret gant eur gomz gwechall, en kreiz tân ar brezel,  
D'o zud n'em vriata en eur pok divarvel !  
Benn ober kement-all 'oa red kaout eur plac'hic,  
Eun aël mad evel-t-houd : Bennoz d'id, Dukezic !

Pebeuz merk a furnez ! Na peger kaer skweriou !  
Hellomp tenna hirie demeuz da vertuziou ;  
Te verk ar pal da galz a rumou tud ar bed (?)  
Da zont de n'em garout, da veva unanet ;  
Rak aboe 'teuz staget an diou vro dre furnez,  
Breiziz a Gallaouet c'hâ mad tre asamblez ?

O n'eum rei vit da bobl p'oa ureët gwelet  
Ar peoc'h a c'houll hirie an holl dud a speret ;  
Santout a raez da Vro n'hei he-unan dister  
Da gerz war lere'h ar pâl merket gant ar c'Hrouer (?)  
Ma p'euz laket he dorn en hini bro gaer Franz,  
Ha kresket d'hê ho diou ho nerz, ho esperanz !  
Ma m'haïnt hirie ganed war hent al Léaldet,  
Gle laket vel breudeur eun deiz poblou ar Bed !

**Charlez ROLLAND.**

*Kuzulier en Guerleskin*

*Couronné au Pardon de Monfort l'Amaury et au Con-  
cours de l'U. R. B. de Quimperlé.*